



BM
QUIMPER

AR ROUE GRALON A KÆR IS

« A boue m'eo beuzet Kær Is
« Neus ket cavet par da Baris.

En escopti Kerne, el lec'h ema brema môr Douarnenez e voa guechal eur guer vras meurbet, hanvet Is.

Eur voguer ledan hag huel, gant sclujou houarn he difenne deus ar môr. Er gêr ze ne velet eu toues an dud pinvidic, nemet dizurs, goal exempl a fallagriez. Gralon pehini a chome neuze en Is, a voa Roue Breiz Izel. Bet e voa brezeller en e iaouanquis, a rust en andret e zujidi; mes en he gosni, sclerijennet dre ar feiz christen e teuas da veza douç evel eun oan. Hirvoudi a re aliez var dizurzou Is, a var ar vue dirollet a rene e verc'h ar princes Athès gant an noblans iaouanq a guer, a deus ar vro hanvet hirie, Kær-Athès, pehini a voa dezi a leve.

En amzer ze ive, e oa en Breiz-Izel, daou abostol santel daou vignon da Zoue, Sant Caourantin, kenta escop à Guemper, a Sant-Guenole (1), kenta abad a Landevennec; aliez ho devoa presegnet ar feiz er guer a Is, a gourdroutet ar Roue Gralon, abalamour d'an droug obero, d'an torfejou a d'an injustiçou a ret bemdez en palez er verc'h iaouanq; mes goab a ret anezo, ac ar Roue, semplet dre an oad, nen devoa mui a c'halloud evit arreti dizurzou ker bras

Doae a skuissas, er fin, o velet Is kaledet en e fec'hejou, ac a roas da anaout da AE Breiz Izel, e vignon Guenole, penos, eb dale pelle, ar guer guær ze a vije beuzet gant ar môr. Kerkent Guenole a bignas voar e varc'h ac a redas da gêr Is, o sonjal c'hoas disarmi koler Doue. Mæs tremenet e oa an amzer a druez Pa en em gavas an abad santel, var dro anternos sklujou Is a voa digor, hag ar môr a c'hroze spontus, o tirullial var an dud, an tier hag ar palejou Guenole ne allas soveti nemet Gralon epken, deus a behini a veler c'hoas roudou treid e marc'h e roc'h Garrek

Athès, merc'h fall ar Roue, kiriec a revin Is, a voë troet e *Mari Morgan* anter maouez hag anter pesk Pa bar all loar, he c'hlever c'hoas aliez o kana, var môr Douarnenez, a uz reinou ar gêr beuzet. He daoulagad a zo evel diou stereden, he bleo evel an aour, he gouzoug hag he diou vron ken guen hag an erc'h, hag e vouez melodiuz a laka da gouskat dre e c'halmou, evel se, martolodet ar vro, ragtal m'he c'hlevont, a lavar entreze gant spouron: « Tec'hom, Athès a zo zavet « deus he phales, ar goal amzer na ma ket pell, a ma to-
« leomp, e vezimb tolet kousket var ar rehyer. »

Kær Is ne ma mui, evel Sodom, Gomor à Babylon; ac hirie ar môr a ruill drest he fen.

Da zio-cel, Gralon, o veza pignet gant Guenole var lein Mene Hom, a dolas ac'hane eur zell truezus var e lerc'h: Mæs ellec'h ma edo ar guær Kær Is, ne velas mui nemet môr

(1). *Guen-oll e. Oil-e-Gusa.* (Il est tout blanc) hanvet evel-se gant e vam ar Santez Ven, abalamour ma oa eur buguel koant a fur. Sant Guenole dre e vertuziou en deus meritet an hano kêr: a AE Breiz-Izel, (l'ange de la Bretagne.

Douarnenez, ac e kouezas d'an daoulin evit trugarecat Doue ac ar Verc'hez da veza savet e vuez.

Pa zavas divar e zaoulin, a velas dindan an heol o lugerni, *Ru Men Golou* pe *Men Ru ar-Golou*, var pehini e vije sacrificiet tud veo, a heb mis, eur buguel bian c'hoas eus ar vron. Neuze beuzet en he zaëlou, ac e zaoulagad saved e trezeck an Ev, e lavaras d'he vignon santel :

« Var ar men ru zont, consacret da eun Doue barbar, me a
« rai sevel eun illis kær d'ar Verc'hes, ac el leac'h ma skuiller
« ar goad da Teutatès e skuillo Mam ar guir Doue he graçou
« var Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'has mad de bromesse, ar beleyen, ar bayanet o veza en em revoltet, pa veljont dispen templ an Doue faos Teutatès ar Roue christen o zrehes e kever Argul, e penn ar Vretonnet convertisset.

Goude beza groet e beden, var Mene-Hom, ar Roue Gralon a heuillas Guenole da abatty Landevennec savet gantan, eun neubeut blaveziou kentoc'h Dirag kement se, en devoa c'hoas roet e bales en Kemper, da Sant Caourantin, pehini en devoa torret an noan dezan, a de compagnunez, gant eun tam deus e besk bian. E plaç ar pales-ze, e ma brema llis kaër cathedral Kemper.

Gralon a dremenas e Landevennec, ar rest eus e vuez, en eur binijen galet, ac alies e ze gant e vignon ker da Remengol, da bedit evit e bobl, *Itron Varia Remed Oil*. Beza en devoa an eur d'he guelet brudet bars e pevar c'horn Breiz-Izel, ac o vervel entre divrec'h Sant Guenole, e Landevennec e recommande e ene da Zoue, en eur lavaret gant fiçians.

« Itron Varia Remengol

« Mirit ouzin na zin da goll. »

C houeuzet kant vloas a zo aboue ma e maro Gralon, ac ar Vretonnet, pere zo bepred tud a feiz ac a galon, ho deus c'hoas sonj eus ho roue coz ac eus e vignon, Sant Guenole Mæs ma c'hanavafen guelloc'h histoar ho bro gaer, pa zeont da zul an Drindet, da bardon bras Remengol, a pa velont môr Douarnenez, Mene Hom, Landevenec, tour huel illis miraculus an *Itron Varia Remed Oil* e lavartfent, an daëlou en ho daou lagat, en eur vale gant respect, var douar ar Saent ac ar Rouane .

« Bras ar buzudou a zo bet.

« Ebars am amzer dremenet. »

Bras ive ar burzudou a ra c'hoas, hirie, an Irton Varia Remengol, en andret an oll Vretonnet, ac ispicial en andret, ar Pelerinet a deu bemde d'he guelet, aliez eus a bell bro, a calz anezo dierc'ken ac e corf o rochedou.


Ar vinoret dilezet, an intanvezet paour, a beorien noas, soudardet Breiz-Izel, en creis tan ar brezel, ar vartolodet var ar môr bras en furol, an oll dud affliget a gorf, a galon ac ar speret darn en ho toaniou, darn en dangeriou, darn all en dizesper, a darn ive, var gouele ar maro ho deus sonj eus ho mam douç a mad, ac alies e leveront dezi, gant carante ha gant fiçians, en he galon hag en he madelez :

« Itron Varia Remengol, patronez Breiz-Izel,

« Pedet evidomp hirie a pa rankimp mervel ;

« Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonnet,

« Ho deus ho caret, ho car hac ho caro bepred. »



GUERS

AR ROUE GRALON A KÆR IS



Var ton : *Judic ac Holofernez ; pe var ton Bocent Elliant*

I.

Petra 'zo neve e ker Is,
M'ar de ken drant ar iaouankis,
A m'ar klevan ar biniou.
Ar bombard ac an tolennoù ?

N'eus e kær Is netra nevez,
Rac ar festou-ma ve bemde,
N'euz e kær Is nemet traou koz,
Rac a festou-ma ve bemnoz.

Bo

Bajennou drez so divoanet
A dor an illizou serret
Ah ; var ar beorein e voëla,
E losker ar chaz d'ho drailla.

D'ha c'hozek via, an oll verc'het
N'ho deus Doue met ar pec'het
A da ober ho c'hurunen,
E roont ho c'hæra rosen,

Athès, merc'h ar Roue Gralon
Tan an ifern en he c'halon,
En pen kenta deus an dirolli,
A drein d'he c'heul ar gær da goll

Sant Guenole, gant kalonad,
So bed meur vec'h e kaoud he zad,
A gant daëlou, an den Doue,
En eus lavaret d'ar Roue :

« Gralon, Gralon, laka eves,
« D'an dizurzou a ren Athès ;
« Rac tremenet vo an amzer
« Pa skuillou Doue e goler

« El lec'h ma voa c'hoarzadek kent,
« E vo neuze skrignadek dent,
« El lec'h ma oa kanaoutennoù,
« E vo neuze skrijadennoù. »

Ac ar roue fur, spouronet
E verc'h en deus kelennet ;
Mæs diskaret dre ar gosni,
N'eus mui a ners da stourm outi.

A skuis gant rebechou he zad,
Evit mont deus e zaoulagad,
Hi deus gret gant droug sperejou
Eur pales kaer tost da sklujou.

Eno, gant e amourouchen,
E ma fenos, an abaden.
Eno, en aour hag en perles,
Evel an heol, e par Athès.

II.

« Plijadur dec'h er pales-man
« Merc'hed gentil a potret skan,
« Plijadur dec'h a nosvez grèn »,
Eme eur Prinç en eur antren.

Ar prinç a zougue diliat ru,
E vaorv e voa hir a|du.
He ol izili a verve.
Hac e zaoulagad a seve.

Ra viot deud mad estranjour,
Eme Athès gant eur beg flour,
Ia, ra vio deut ar gwella,
M'or c'hanviet an traou falla,

Neuze em bo digomer mad,
A respontas an divroad :
Rac me er fall a zo ken disket
Hac an hini n'eus e c'hrouet.

A kerken Athès d'er pedi,
Da ober eun dro zanç ganti,
Hac an oll, a enep Doue,
Goassan ma c'hallent a doue.

Pa oa d'an abaden-ze fin.
Danser Athès, en eur c'hoarzin,
Hac en eur zével he ziou skoa,
A lavaras : « nouzoc'h netra ! »

Kerc'hit din-me deus a gær Is
Veseiltou santel an Illis,
Kerc'hit croas ha crucifiet
Eun hosti sacr hag e velfet !...

Athès a respontas timad :
Ravet vent e chapel va zad,
Ha va zad diot c'hoas a gred
En trompler ze a Nazareth !...

Tri a redas en ber amzer,
Hag a siskaras an Anter,
Hag an traou sacr a voe douguet
Entre daouarn du ar pec'het.

Ar Prinç ru, ractal m ho guelas,
A greis e galon a c'hoarzas,
Hag a lavaras c'hoas ennan,
« Plijadur dec'h er pales-man ! »

Da guenta, a doliou boutou,
E vrujunas e veseillou,
Goudé flattras ar grucifi,
Aag e kranchas var an hosti !

A varne gant an oll e noas,
En eur gana : « Mallos d'ar groas »,
E ras, en seiz stum dishenvel,
Dansou a zeiz pec'het marvel,

Kerkent ar pales a grenas,
Hag ar c'hurunou a strakas
Hag a dreus ho zellou nec'het,
Eskoas tan glas ha luc'hed.

« Na c'houi vel, eme ar Prinç ru ;
« Me laka Doue var e du ! »
Hag e lavarent gant glac har :
Athès he deus kavet e far !

III.

Pa voa fin d'ar scrolejou,
Messenger an drouc sperejou,
Chomet e hunan er pajes,
A dostaat da gaout Athès :

« Va doucik koant, merc'h da Gralon,
« A muia karet ma c'halon
« A nalfen me ket enep guis
« Guelet alc'houe sclujou Is. »

« — Va zad a zoug en e guerc'hen,
« An alc'houe aour deus eur chaden,
« A va zad breman zo kousket,
« A kaout an alc'houe n'allan ket. »

Mæs en he zreid a neun strinkas,
A d'he dornik flour a bokas,
Hag e c'halmas dre e zellou,
Karguet a dan hag a zaëllou.

IV.

Hep goud ar pezh a dremene,
Neuze, eur pennad ac hane
En e bales Roue kos
A voa kousquet e creis an noz.

Kampr paour Gralon ne voa enni,
Netra nemet eur grucifi,
Deuet a zorn eur mignon ker,
Sant-Caourantin, escop Kemper.

Netra nemet eun Aviel.
Roet c'hoas gant eun den santel,
Roet dean gant Guenole
Evel eur merk a garante.

Kær en e gosni, vel eun Æl,
E kouske Roue Breis-Izel,
Hag en dro de dall, e vleo guen,
A re dispak, eur gurunen.

Neuze Athès, ar brinces fall,
Evel par vije skoet dall,
Sioul en e gampr, dre urz Doue,
A deu da laërres an alc'houe.

En eur vale var bek e zroad,
Ar verc'h a dosta skan d'he zad
A doustadik, deus e guerc'hen,
E ten ep c'hoarzin, ar chaden.

V.

Piou a deu duont gant ar ru,
Fignet var eun inkane du,
Hag en dan daou lamp var e guein !
Ken ar strink an tan d'eus ar vein.

Hennes eo messenger Doue,
Digasset en Is d'ar Roue,
Hennes eo abostol ar feiz,
Sant Guenole, karet en Breiz.

Tostat a ra e c'haloupad.
En e zorn deo e vaz Abad,
Hag eur stol aour var e saë ven,
Hag eur c'hlerc'h tan en dro de ben.

N'eur gavet en ôr ar pales
En hini gousk tad Athès,
Divar e varc'h, an den santel,
A c'hal, en nos, a voës huel :

« Gralon, Gralon, sav hep dale,
« Sav evit heuilla Guenole,
« Sav evit tec'hel deus ar mor,
« Sklujou Kær Is a zo digor ! »

Hag a roue koz trubuillet,
Er mes e vele zo saillet :
« Din-ne, din-me, va marc'h prima,
« Siouas ! peur gollet ar gæer-ma ! »

A gant glac'har, a ber amzer,
E kers da c'heul e vignon ker,
A var ho lerc'h, eu eur hyudal,
E klevont ar môr e ruillal.

Neuze ar Brinces dirollet,
He amoureux ganti kollet,
Dre guer Is, a glei hag a zeo
A rede, dispaket e bleo,

Mæs pa gleo daou lamp ar c'hezek,
Arog ar môr e tiredek,
Dre al luc'hed, gant nec'hamant,
E c'hanve he zad hag ar zant.

« Va zad, va zad, ma em c'herit,
 « Var o marc'h skan e c'homerit. »
 Ac eb respont, an tad tener
 A zav e verc'h var an tailler.

Kerkent ar mor a vuanna,
 A Guenole en eur grena,
 A gri : « Gralon, tól an diaoul ze
 « Divar tailler da hinkane !... »

Koulskoude c'hoas, leun a ankres,
 An tad a zalc'h ar bec'heres ;
 Mæs ar sant a ra zin ar groas
 A deu ac a sko gant e vas

Kerkent mestrez an drouk spered
 A ruill en holliou fulloret.
 Ac e cleo tost ar Roue koz
 Eur c'hoarzin sklisir e creis an noz

Mæs rentet skanvoc'h hep dale,
 E sail prim da c'heul Guenole.
 Ac e varc'h gleb e beder *date*, *char*
 A lamp deus ar mor en douar,

VI.

Da zoa heol, ar Sant a Gralon
 A bigne var lein Mene Hom,
 Pini e dreid ebars en trez,
 A zro a zu Douarnenez

Ac'hane, Roue Breiz-Izel.
 Var e lec'h a dolas eur zel,
 Mæs, e lec'h Iz gant he dek dor,
 Ne velas mui nemet ar môr,

« Eur guer em boa deus ar haëra
 « A cetu hi et da netra !
 Ac e galon, oll a fraillas,
 Ac e zaoulagad a voëllas,

« D'an daoulin eme Guenole,
 « Gralon, d'an daoulin gane me. »
 A Gralon dindan e c'hlac'har,
 A goë d'an daoulin d'an douar.

Ac eno dispak e vleo guen,
 Ac e dall pleguet er boutren
 E lavare c'hoas ar Roue :
 « Ra vo gret bolante Doue »

Pa zavas divar e zaoulin,
 Dindan tãu flam heol ar miantin
 E velas, adreiz e zaëliou,
 E luha *Men Ru-ar-Goulou*.

Var ar men-ze hon tadou kos,
 A skuille goad d'eun Doue faos,
 Ac ar Roue en ber amzer,
 A lavaras d'he mignoa ker :

- « Duont en memor kær Is,
- « Me rai sevel eun Ilis,
- « Ac evit testeni d'an oll,
- « Me galvo Ilis Remengol, (1).

- « Pa vo an doueou maro,
- « A koet meur a goat dero,
- « Eun de deus ar pevar avel,
- « Teuio d'y popl Breiz-Izel

- « Rac var dolmen ru deus ar Teutatès,
- « Me lakef da ren ar Werc'hes,
- « Ac evit henori ar groas
- « E c'hordreni eur pardon bras.

- « Eno an oll dud affliget
- « A gavo d'ho foaniou remed,
- « Silvidiguez d'ho ene,
- « Dre c'hras Mari, guir vam Doue.

- « Neuze m'ar be sonj a Gralon
- « E vo lavaret a galon :
- « Bras ar burzudou a zo bet
- « Ebars en amzer tremenet!...

nikho ene



Peden ar Roue Gralon

— Itron Varia Remeugol,
Mirit ouzimp ma zaimp da goll,
Pedit ive, ho ma Jesus,
Ma vesimp gantan evurus.
— Itron Varia Remengol,
C'hui eo rouannes ar bed oll,
C'hui eo hor mam, hor batrones,
A ni ho meulo da james.



(1). Remengol, da lavaret, e *Remed-oll*, a roue Gralon, a chenchas hano payen, Rumengoulo : *Ru-Men-ar-Go* .lou pe *Men-Ru-ar-Goulou*, en hano christen a *Remengol*, deus eur behini ar batrones, a voa havet an *Itron-Varia-Remed-Oll* (Notre-Dame de tout remède), abalamour d'ar burzudou bras a ra bembé, euo, ar Werc'hes, a boue amzer ar roue Gralon, betec hirie,